



# MEULEUDIGUEZ

AR

**MERC'HET HAC AR GRAGUEZ,**

PE RESPONT

**DA CHANSON POLTRET AR MERC'HET**

**HAC IMPERFECTION AR GRAGUEZ,**

COMPOSET

**EVIT RENTA JUSTIÇ D'AR VIRIONEZ.**



Var ton Chanson an Arc'hant.



**C'**HOUI pion benac voe gen hardi da zrouc comz eus  
ar merc'het,

En ur chanson nebeut poli, deut d'am selaou, me ho pet;  
Mont a ràn da guemer difen ar penn-œuvreus an natur :  
Credi a ràn em bo rêson dirac qement a so fur.

En eur gomposi ar son-mâ, ne drempin qet va fluen  
Nac er vestl, nac en huellen, m'en assur a dra certen :



Ar virionez, hep netra qen, a gunduo gant rêson  
Va speret da renta justiç da rouanez ar galon.

Ha possubl ve e vez cavet un den qen disqiantet  
Da gredi scrifa en enep ar graguez hac ar merc'het!  
Penos e vet bet qen hardi da garga a zefautou  
Ur sex pini na dle receo nemet peb meuleudiou!

En ur jardin e ve guelet ros, fourdilis ha levant,  
Hac a bep seurt fleuriou charmant hac a so meurbet  
brillant,

Ha ma qever en o zoues ur blanten ne ve qet mat,  
Arabat eo o zamal oll, se ne ve qet delicat.

O sex caret dre ar bed oll, rouanes hor c'halonou,  
Deurvezit receo an hommach a rentàn d'ho meritou.  
Biqen na elfen ho meuli gement hac a veritet;  
Mes, mar plich ar chanson-mâ dêc'h, e vin eurus bras  
meurbet.

Da guenta tout, sonjomp ervad piou e deveus hor ganet,  
Piou a soignas hon oad qenta, piou e deveus hor maguet,  
Piou a ziscas demp-ni bale, comz, hac hor soigni nos-de,  
Hac a voe qer carantezus evidomp hed e bue?

Ul lezen demeus an natur hon doug atao da garet  
Ar vam dener e deveus bet epad nao mis hon douguet,  
Hac epad an termen bir-se, nac a sourci e devoe  
O clasq conserv ar froues tener demeus e oll garante?

Neuze pa e deveus ganete c'hrouadur, gant poan vras,  
E mâ nos-deiz ouz er soigni, rac na repos mui, siouas;  
E speret hac e daoulagad so bepret var e buguel,  
So qer coantic en e gavel, ma sonchet e zeo un El.

Pini e zeo ar guer qenta a brononç ar buguel-màn?  
Ma n'en deo qet ar guer tener, ar gomz meurbet douç  
maman?

En e joayou, en e boaniou e vam guès a a hanv bepret,



Ar pezh a so ur merq patant deus e garante barfet.

Gant pebes soign ha pezh douçder, pa vemp clân var  
ar goele,

E clasq ur vreg hor soulagi! n'en deo oll nemet ene.  
Un adres ar vrassa e deus hac un êr qer delicat,  
Mar gemeromp demeus e dorn qement a ro, fall pe vad.

Guelit en e bugaleach, peuryuia ur botrezic,  
Bepret e vezo occupet o c'hoari tieguezic.

Ur boupinen so eviti an dra ar preciussa:  
E dorloti a ra evel ur vam e buguel amâ.

Ar merc'het a so tamallet evel pennou avelet;  
Mes ha n'eller ivez rebech ar memes tra d'ar voaset?  
Nac a voaset so intourdi vel m'eo ur giroaeten,  
Hac a dro da bep seurt avel, qer scân ha ma zeo o fen!

Petra a gaver en ur plac'h a verit ar rebechou?  
Ha n'en deo qet enni e rên ar gaerdet hac ar graçou?  
Ha n'en deo qet ar merc'het eo ar penn-œuvreus un Doue?  
Perac neuze clasq defautou en objet ar garante?

Mar teu daoulagad ar merc'het d'ho talla ouz o zellet,  
Vel a ra an eol beniguet, pa ve reir amzer fixet,  
N'o sellit qet gant re attach, mar santite reont dêc'h poan,  
Mes tec'hit ha pellaît prompt, n'ouffec'h ober re vuan.

Mar deo monstrou an oll merc'het, evel a blich  
dêc'h laret,  
Penos oc'h eus ar sottoni d'o c'hlasq ha d'o darempret?  
Dont da garout, da cherissa un dra a so dangerous,  
A so certen ur follentez, ha na verit nep excus.

Anzavit oll gant güiriones, ha n'oc'h eus qet lavaret  
Ur veach benac pa vijech o tarempred ar mere'het,  
E ranferment an oll guenet, e voant caer, e voant brillant  
Evel ma velomp da greiz-de an eol bars ar firmamant.

O zal a voa hanval buec demeus a volz gaer an ee,



O daoulagad diou stereden , ar boneur a voa enne ;  
 O diou chod rus voa ur parter , carguet a ros hac a lys ,  
 O dent a voa diou renq perles demeus ur guender esqis.

Songit mad p'en devoe Doue crouet, d'e c'hrat ar vaoues,  
 E cavas qer caer e labour, mar teuas crenn da baoues ;  
 Rac dre m'en devoa e formet evel e œuvr ar c'haera ,  
 E falvezas dezàn repos goude ober ur seurt tra.

Ur plac'h yaouanq , fur ha modest, so ornament ar  
 bed-mâ ,

Rouanes an oll fleurennoù , ur rosen eus ar gaera ;  
 E furete a so hanval demeus ar fourdilisen ,  
 E douçder a represant demp sempldet ar violeten.

Coulz eo beza en un desert evel beza assamblet ,  
 Ma na vez qet en hon toues ur certen nombr a verc'het.  
 Me lavar hac a lavaro penos neus nep plijadur  
 Elec'h ma vanq ar sex charmant, güir ornament an natur.

Bezomp oll eta evite e peb amzer respet bras ,  
 Ha na laromp diouz ar merchet nemet vad e peb seurt cas.  
 Rac dont da zrouc comz dioute, neo qet fêt un den galant :  
 O meuli hac o enori a dleomp assuramant.

O sex ! objet va c'harantez , recevit va meuleudi ,  
 Heb doc'h neus neb boneurer bed, qement so eo melconi ;  
 Mes evit tremen ar vuez , ma eller d'êc'h-hu plijout ,  
 Assur e vezor evurus : ennes eo ar c'henta tout.

Guelit amâ un den yaouanq , pa vez oc'h ober al lez ,  
 Na gav nep seurt contantamant nemet etal e vestrez.  
 Nos ha deiz e mâ o sonjal er boneur en devezo  
 Er moment a evurustet ganti ma en em gavo.

Piou a zisq d'ur buguel pedi, pa gommanç da gozeal ?  
 Ha n'en deo qet ar vam dener gant eves dreist ordinal ?  
 Oll momentchou eus e bue so consacret d'e buguel :  
 Hac evit e savetei eo prest atao da veryel.



Leñnit gant soign vad peb histor a so a viscoas scrifet  
 Hac e velot traou burzudus rapportet var ar merc'het.  
 Re hor be da zont d'o scrifa, rac abusi a rafemp  
 Deus a vadelez hor c'haner, ar pezh ne felse qet d'emp.

Ne gomzìn nemet a ziou vreg demeus a guær Mon-  
 troulez;

Pere ra ar brassa enor da bep plac'h, da beb maouez:  
 An itron eus a Rosampoul hac ar plac'heus ar ru Vras,  
 O devije bet grêt certen o baro da veur a voas.

Anzavit eta, oll goaset, e zeo trec'h dêc'h ar merc'het,  
 Hac ec'h ellont, e peb amzer, beza dêc'h oll preferet.  
 Mes bezomp oll just ha leal: tout hon eus hon defantou,  
 Ha tachomp prest d'en em orni demeus a bep vertuziou.

Sperejou du, melconius a gavo da lavaret  
 Abalamour ma soutenàn qement all caus ar merc'het.  
 Mes lezit-e da lavarar, me a gred a dra certen,  
 E vezo contant ar merc'het dre ma teuàn d'o souten.

Guelit memes ar vodesti deus ar merc'het en dançou,  
 Bepret etrezec an douar e zeo fixet o zellou.  
 An douçder, an humilite a so bepret o fartach,  
 Rac se, anzavomp oll, goaset, e tleomp dê peb hommach.

Nan, na eller nemet gounit e compagnunes merc'het,  
 Peb dereadeguez atao a zisquer d'o darempret;  
 Me gomz amâ en general; rac mar deus unan benac  
 A verit blam, goas evite, devinout a rêr perac.

Ne gomzàn nemet a vere'het demeus o sex an enor,  
 Pere, eus ar societe, a ra ar c'haera decor.  
 Int eo a dleomp da veuli a galon hac a speret,  
 Rac meritout mad a reont demeus hon pers peb respet.

Hac én a so ur stat tristoc'h eguet chom hep demezi?  
 Na gaver nep contantamant, na santer nemet anvi.  
 Evit souten poez ar vuez, demezi a so guelloc'h:




Pa voar daou o touguen ur sam e vez cavet calz sc'anyoc'h.

Mes, neo get a voalc'h dimezi; ret eo ivez sonjal mad,  
Ober boneur ho pried ger, dre bep soign, dre bep seurt stat;  
Sonjit mad en amzer curus ma voac'h oc'h ober al lez,  
Hac e vezot meurbet contant atao epad ho puez.

Caer ho pezo cavet abec ha cagetal ar merc'het,  
Me ho quello un deiz benac o tonet d'o zarempret;  
Neuze, douc evel un oanic, c'houi lavaro d'ho mestres:  
Va c'halonic qez me ho car hac ho caro da james.

Qent dont da achu va chanson, e regetan ouz Doue  
Evite oll peb seurt boneur etro pado o bue  
Prosperite, contantamant, anfin tout o desirion  
Ha dreist oll ma vezint ornet demeus an oll vertuziou.

FIN.



## CONSTANC DAOU C'HALANT SEPARET

*Var un ton anavezet.*

**B**RASSA chagrin var ar speret  
A oufe bigen beza,  
Eo caret ha beza caret,  
Ha rancont dispartia :  
An diou galon a vez mantret,  
Hag o diou e tizec'hont;  
Caer o deus beza separet,  
En em garet a rancont.

Resista oc'h ar garantez  
A zo control d'an natur,  
Nep ne zelaou get e mouez



7  
A zo ur monstr a dra zur.  
Hi a so certen ar guenta  
Eus a lezennou ar bed :  
Petra dâl sonjal resista ?  
Mestres e vezo bepret.

Ar c'hoajou z'o d'al lapouset,  
D'an dour eo ar rivierou;  
Ar mor bras a zo d'ar pesqet;  
Ar firmamant d'an astrou;  
Va c'halou zo d'ar garantez,  
Evit caret emeus-hi,  
Me zant hac a gleo e mouez,  
Senti a rancàn outi.

Nep a garàn var an douar  
Am c'har-me ive d'e zro;  
Biscoas ne meus bet ar glac'har  
D'e guelet ur vech e dro.  
Hon daou e zomp atao contant  
Evel an durzannellet,  
Ha neus qet c'hoas bet en instant  
Na vemp-ni en em garet.

Un destin, var a lavarer,  
A so o regli peb tra;  
En a ra hirio hor boneur,  
Varc'hoas hor chagrin vrassa.  
An destin cruel ha barbar  
En deus hon dispartiet;  
Mes, en despet d'hon oll glac'har,  
Fidel oump atao chomet.

Leusqet en deus, en e arrach,  
E oll vinim da redet,  
Hac e clasq pilat hor c'hourach  
En deus én guell cimantet.



Destin ebet , en assuranc ,  
 Ne doro hor c'harantez :  
 Mont a rai hor perseveranc  
 Qeit a ma zay hor buez.

Lezomp an destin pretantet  
 Da uza e oll ardou ;  
 Lezomp an arne egaret  
 Da ober e c'hoariou :  
 O daou e zint qer variant ,  
 Na oufet fiziout enno ;  
 Mes hor c'harantez so constant :  
 Netra james n'e zoro.

En em garet en honestis  
 Hon eus great a dra sur ,  
 Ila tremen gyê hor yaouanqis ,  
 Ha gant calz a blijadur.  
 Ral eo bremâ m'en em velomp ,  
 Abaoue hon disparti ;  
 Evel ato en em garomp ,  
 Mes hep en em frecanti.

Coust a ra da vouir mignonet  
 Ober ur seurt disparti ;  
 Evit deomp ezeo coustet ,  
 A ellomp da asuri.  
 Mes na gollomp qet a fizianç  
 Ni a en em gavo e'hoas ,  
 Hac a zisquezo hor e'honstanc  
 Partout evel a hiscoas.

FIN.

---

E Montroulez , e ty LÉDAN , e traon ru ar Vur.